

# Ma roll-meuzioù e brezhoneg

- Krouiñ ul liamm gant ho pratikoù hag a gomz brezhoneg ha zoken gant ar re na gomzont ket.
- Lakaat war wel eo liammet ho preti gant ar vro.

## Alioù

- Moaien 'zo deoc'h kinnig ur roll-pred disheñvel evit pep yezh : unan e galleg, unan e soazneg, unan all e brezhoneg hag all... ha kinnig ar gartenn a glot gant ar yezh 'vez komzet gant ho pratikoù. Met kollet e vo **ar gamara-diezh** a vez digasaet gant ur roll-pred liesyezhiel. Souezhet ha plijet e vo an holl, brezhonegerien pe get, o welout brezhoneg. Un digarez evit deskiñ un nebeud gerioù en ur c'hortoz ar servijour.
- Kinnig a reoc'h predoù hengounel ? Ur roll-pred nevez kompozet gant produioù ar vro ? Ar brezhoneg a ziskouezo d'ho pratikoù eo **gwirion** ho keginañ.

### A c'hell bezañ graet ivez :

Dibab un anv e brezhoneg evit ho pladad sinadur.




## Da gaout soñj

**Kondreoù paper** a implijoc'h ? Soñjit urzhiañ anezho d'ur grafour-ez brezhoneger-ez ar wech kentañ ho po ezhomm reoù nevez. **Kondreoù a liv gant ho preti ha divyezhek** ho po ! Tu zo ijinañ kondreoù evit ar vugale gant c'hoarioù pe liverezh e brezhoneg zoken !



Kondreoù paper savet gant Ti Douar Alre



Roll-meuzioù galleg-brezhoneg Tim Lipouz da gavout e Ti Billig, Plomeur Bodoù

## Liammoù

Klikit amañ-dindan evit :

Lenñ geriaoueg ar boued savet gant Ofis Publik ar Brezhoneg.  
[www.brezhoneg.bzh](http://www.brezhoneg.bzh)  
(rubrik : embannadurioù / geriaouegi)

Pellgargañ hor roll-meuzioù skouer teiryezhek galleg-brezhoneg-saozneg war [mignoned.bzh](http://mignoned.bzh)  
(rubrik : pourchasoù / ostilhoù)

